

Tud ar vro - Bro Leon
Roll kanaouennoù - Dañs round

Da Vrest 'zo deuet ur vatimant
Enez Vazh

Da Vrest 'zo deuet ur vatimant,
Da Vrest 'zo deuet ur vatimant.
A zo karget a dud yaouank manturladirette,
Il faut apprendre avant d'aimer manturladire.

Ur plac'h yaouank o deus laeret,
Da gas ganto d'o batimant.

Roulzit au large martoloded,
Ur plac'h yaouank hon eus laeret.

Ar plac'hig kaezh sur a ouele,
Ar vartoloded a c'hoarzhe.

Plac'hig yaouank na ouelit ket,
Kar ho puhez ne golloc'h ket.

Kar ho puhez ne golloc'h ket,
Hoc'h enor ne lavaran ket.

Ar c'habiten a lavare,
Leskit ar plac'h da vont d'he bro.

Leskit ar plac'h da vont d'he bro,
Din ez eo erru ar maro.

Roit din daou pe dri c'hant skoed,
'vid hoc'h enor n'o dezo ket.

Ouzh ar plac'hig ez oa joa,
Hag ouzh e arc'hant hiroc'h c'hoazh.

Ar botoù lèr talounet ruz,
Sellout ar plac'h 'yoa ker joaius.

An taboulinoù 'zo e kear,
Erru ar plac'hig d'ar gear.

Da Vrest 'zo deuet ur vatimant,
A zo karget a dud yaouank.